



# KARGET A GEFRIDI MELESTRADUR - KONTOURIEZH

Krouet eo bet kevread SKED evit kas war-raok ar brezhoneg ha sevenadur Breizh e bro Vrest. Savet eo bet SKED evit bodañ, unaniñ ha liammañ nerzhioù tud (kevredigezhioù pe hiniennoù) a-benn lakaat ar brezhoneg ha sevenadur Breizh da vevañ ha da ziorren.

Palioù kevread SKED zo komz e añv e izili hag harpañ o obererezh, bezañ un talbenn anavezet ha brudet evit ur rouedad stank ha kreñv a oberourien a labour evit kenderc'hel ha diorren ar vreizhadelezh e bro Vrest.

Pal SKED zo ivez bezañ ul lec'h degemer hag eskemmoù gant sevenadurioù all.


Evel unan eus oberourien ar vuhez sevenadurel e kenlabour SKED gant an ensavadurioù ofisiel.

## Darempredoù labour

An den karget a gefridi a vo dindan atebegzh rener ar gevredigezh.

## Kefridi

Merañ al lodenn velestradurel (gant ar rener), bezañ e karg eus ar gontouriezh ha sevel ar follennoù gopr. Kenurzhiañ ar sekretourva (skrivadurioù, darempredoù gant an dud, dielloù, ...). Kemer perzh e obererezhioù hollek ar gevredigezh.




### Melestradur - Sekretourva

- ✓ Ober war-dro al lizhiri (postel hag elektronek)
- ✓ Degemer dre bellgomz
- ✓ Degemer ha titouriñ an dud war al lec'h
- ✓ Renabliñ / Renkañ / Dielloù



### Merañ ar goprou

- ✓ Diskaradurioù DSN hag hizivadur ar meziant Impact Emploi
- ✓ Evit implijidi SKED (14) ha re ar c'hevredigezhioù ezel (20)



### Merañ an enskrivadurioù & heuliañ ar paeañ


- ✓ Heuliañ bezañs an deskidi, ar skodennoù
- ✓ Dastum an titouroù evit sevel ar fakturennoù
- ✓ Bezañ e karg eus ar c'hendivizadoù gant ar gevelerien



### Kontouriezh

- ✓ Bizskrivañ roadennoù ar gontouriezh hollek hag enrollañ ar skriturioù
- ✓ Fakturenniñ ha heuliañ
- ✓ Merañ prenañdennoù an dafar

## An den klasket



Bezañ aozet mat, emren, gouest da gas ul labour melestradurel war raok.  
Barregezhioù sklaer e Kontouriezh  
Skiant prenet evit sevel ar follennoù gopr (gant ar meziant IMPACT EMPLOI e vefe dreist)  
Anaoudegezh eus mont en-dro ar c'hevredigezhioù  
Mestroniañ ar brezhoneg  
Gouest da genlabourat gant ur skipailh

## Da c'houzout

Lec'h labour : Brest  
Deziad ar c'hinnig : 15 a viz Even 2020  
Penn kentañ ar c'hevrat : 1añ a viz Gwengolo 2020  
Deziad termen evit lakaat he/e anv : 15 a viz Gouere 2020  
Kevrat : Didermen  
Amzer labour : 30e pe 35e hervez an den  
Kendivizad ar buhezañ, Koef 255

**Respont da SKED : [degemer@sked.bzh](mailto:degemer@sked.bzh) / 02 98 80 26 71**